



An taolioù-maen

Hentad dizoleiñ Sal 2



Brudet eo Karnag er bed a-bezh evit he farkadoù peulvanoù. Mes kavout a reer "meurvein" all eno... ar c'hrec'hioù, ar c'hrugelloù ha dreist-holl an taolioù-maen !

Anv

Anv-bihan

Deiziad

1

Ar meurvein

Skriv dindan pep skeudenn anv an tri seurt savadurioù meurvaenek pennañ a gaver e Karnag :

krugell - taol-vaen - peulvan



2

An taolioù-maen zo savadurioù « meurvaenek » savet gant pikoloù mein

Hiziv eo kouezhet en o foull al lod brasañ eus an taolioù-maen. Ne chom nemet un nebeud pikoloù mein anezhe. Setu amañ div skeudenn eus taolioù-maen a-ratre. Pelec'h emañ ar pikoloù mein ? Kelc'h anezhe.



Karn Gavriniz (An Arvor-Baden)



Karn ar Mont Bihan (Arzhon-Rewiz)

Steuñv eus Taol-vaen Kergadoù e Karnag

- 3** Sell pizh ouzh an tres-mañ (armel-wer 5), klask anvioù al lodennoù pennañ eus ar savadur-se ha skriv anezhe war an tres.

A- Anv ar framm mein a do ar gambr hag an trepas a denn un tamm da anv ar gêr m'emaout bremañ !

Ur.....

B- Al lodenn eus ar savadur ma lakaer ar c'horfoù-marv hag ar profadennoù


Ar.....

C- Petra e vez graet eus ar framm a stag diabarzh ha diavaez ar savadur ?

An.....

D- Moarvat e oa klozet an daol-vaen gant un nor en diavaez? Petra e vez graet eus al lodenn-se ?

Ar.....



- 4** Da betra e servij un daol-vaen, da'z soñj ? Savet eo bet an taolioù-maen evit servijout da (ask ar respont a-zoare)

☐ Aoter evit aberzhiñ tud

☐ Iliz/templ

☐ Goudorenn bugulien

☐ Ti-annez

☐ Bez bras-divent

☐ Taol evit ramzed

- 5** Ac'hanta, gwelet ez peus al lec'h a zo a-us dit ? Un adskeudenn eus toenn taol-vaen Mane Rutual e Lokmaria-Kaer an hini eo (ar sel mar fell dit). Evel pet karr-boutin ez eo pounner, da'z soñj ? Kelc'h ar respont a-zoare.



(20 tonenn = 20 000kg)



(40 tonenn)



(200 tonenn)

- 6** Er bezioù-se e kaver traoù profet d'ar re varv (profadennoù). Sav roll an traoù a zo bet kavet en taolioù-maen gant harp armelioù-gwer ar sal 2 (armel-wer 5 hag an hini goude). Evit pep hini eus an traoù-se, e c'hallez menegiñ gant peseurt danvez eo bet graet.


-
-
-
-
-
-

- 7** Er c'hontrol diouzh bezioù all klozet da vat goude ma oa bet lakaet ur c'horf enne (ar c'hrugelloù) e oa un nor war an taolioù-maen. Perak, da'z soñj ?

.....

.....

- 8** Tres un daol-vaen.



E Breizh ec'h a an eskern da get abalamour m'eo trenk an douar. Dibaot-tre en em virent. Kae da welet ar skeledenn wir a gaver e penn-kentañ gweladenn ar mirdi (armel-wer niv. 4 : Plac'h Tevieg hag a veve 7500 vloaz zo)



An taolioù-maen

Hentad dizoleiñ Sal 2

Fichenn ar respontoù

Evit ar gelennerien pe an ambrougerien



Ar meurvein

Evit kompren ar meurvein e ranker gouzout emeur gant ur meiziad rivinoù. Deuet eo ar savadurioù meurvaenek betek ennomp evel rivinoù hepken. Pa weler pegen diaes eo mirout e ratre vat hor c'hastelloù eus ar Grennamzer e kompren e vefe savadurioù 6500 vloaz, evit lod anezhe, en ur stad truezek.

Splann eo ar stad rivinoù-se evit an taolioù-maen... Soñjal a ra an dud, diwar romantelezh an ^{XIX}^{vet} kantved, ez eo an taolioù-maen taolioù savet gant mein, aoterioù savet evit aberzhoù gwadek gant an drouzed. Ma weler an traoù evel-se e fazier evel-just.

E gwirionez n'eo an taolioù-maen nemet aspadennoù eus kambroù-bez e monumantoù a oa kalz brasoc'h gwezhall, pa oant kuzhet dindan ur bern douar ha mein o goloe. E gwirionez, en deroù e oa an taolioù-maen mougevioù artifisiel dindan moudennoù artifisiel. An daol-vaen eus bro Karnag, hag a zo bet miret ar gwellañ, Mane-ar-Groez, zo e park kastell Kergadoù. Mard eo an hini nemeti eo chomet he golo warni eo peogwir e oa e park ar c'hastell just a-walc'h, en ul lec'h difennet d'al labourerien-douar ha n'eo ket deuet da vezañ ur vengleuz gante, hag ouzhpenn e oa gwarezet an daol-vaen gant ur groaz kristen a gaver a-us dezhi.

E kemm diouzh ar c'hrugelloù, hag a oa bezioù hiniennel hag implijet ur wezh hepken (klozet e veze ar bezioù da-vat gant mein ha douar), an taolioù-maen a oa monumantoù-kañv ma veze savet un trepas etre an diavaez hag ar gambr, un tremen etre bed ar re vev hag ar re varv. Setu e veze adimplijet ar gambr-vez a rummad da rummad.

Diwallit... Alies e komzer eus bezioù stroll pa vez anv eus an taolioù-maen, kement ha diskouez ez ae ar c'hevredigezhioù neolitik war zemokratelaat e fin ar ⁵^{vet} milved hag e deroù ar ⁴^{vet} milved, e kemm diouzh ar c'hrugelloù gant bezioù hiniennel hag a ziskouezfe kevredigezhioù renet gant uhelidi binvidik, kevredigezhioù gant un urzhaz. Neoazh, n'eo ket ar gwirvoud arkeologel ken splann se, ken krak-ha-berr.

Diskouezet ez eus bet e veze beziat, e Breizh, er ⁴^{vet} milved, well-wazh, ur c'horf e pep rummad e kambr un daol-vaen. En un daol-vaen implijet e-pad 5 kantved e kavor un ugent korf bennak... Pell em-aomp diouzh ur bez stroll ! Ma keñverier gant an amzer-vremañ, ne soñje den ebet, o welet bezioù familhoù meur ar vourc'hizien pe tud an noblañs hag a gaver en hor beredoù kêr, emañ dirak bezioù stroll... Anat eo ez int bezioù hiniennel, an eil e-kichen egile, ha pa vefe meur a zek anv warne... Bezioù familh int, mozeleonoù kañv ar familhoù. An taolioù-maen gant trepasoù a gaver e kreisteiz ar Mor-Bihan, eus ar ⁴^{vet} milved, a oa ar memes implij dezhe moarvat... An taolioù-maen ne oant ket graet evit an holl dud... Miret e vezent evit ar familh a oa o ren, evit ar bare pe ar c'hasta a oa o ren ar vro hag evit an dud staget ouzh ar vro-se.

Beredoù tierniezhioù e oant moarvat, hag un doare da staliañ war an dachenn, evit pell amzer, gwirvoud ur reizhiad galloud ha strategezhioù familh pe nested evit an treuzkas anezhi.

Evit bremañ eo diaes-tre lakaat war wel peseurt implijoù a oa d'an taolioù-maen. Gant pep monumant ez eus perzhioù dibar a-fet arkitektouriezh pe lidoù.

Savet e voe an taolioù-maen e dibenn ar ⁵^{vet} milved (adal -4 100) hepken. E-pad an ³^{vet} hag an ²^{vet} milved e emdroas kalz an arkitektouriezh kañv ; d'ar c'houlz-se e voe savet monumantoù ma oa pouezusoc'h ar gambr eget an trepas, evit mont betek kendeuziñ gantañ... An alezioù toet int.

Evit echuiñ e rankomp derc'hel soñj e talvez ar savadurioù meur, n'eus forzh pehini e vefe (kastell Versailhez pe ti-kêr ur gumun), da gentañ penn, d'an uhelidi a zo e penn un tiriad d'ur mare resis, da ziazezañ o frezeg er vro. Un doare eo da reishaat o aotrouniezh, d'he bountañ war ar gevredigezh. An daol-vaen, gant he ment vras, zo mestr war ar vro ha war an dud a zo staget outi. Bez' e oa an taolioù-maen, evel an holl veurvein, dreist pep tra, un doare da gontrollañ an dud a oa o vevañ en un tiriad.

Respontoù hentad dizoleiñ ar sal 2 - An taolioù-maen

- 1 Setu, a gleiz da zehoù, anvioù an tri seurt meurvein a gaver e Karnag : peulvan / krugell / taol-vaen
- 2 An daol-vaen zo skeledenn kambr ur monumant-kañv a oa kalz brasoc'h gwezhall. Douaret e oa pe lec'hiet e-kreiz ur c'harn (da lavaret eo ur yoc'h vein dijuntr ha/pe douar). An daol-vaen eo ar pezh a chom ur wezh aet ar c'holoenn mein dijuntr ha douar-se diwar wel. War ur monumant e ratre vat ne weler nemet an tri-maen antre (an tri maen hag a ra ur porched).
- 3 Eus ar c'hrec'h d'an traoñ :
 - A – «Le cairn» Ar c'harn (moarvat e sinifi an anv Karnag kement ha « lec'h ar c'harn », un takad meinek, ul lec'h ma kaver ur bern mein). Gant ar c'harn eo gwarezet ar bez ha merket an ardremez. Reiñ a ra ur seurt meurded d'ar bez hag ur framm d'an ardremez, ken unan gwir ken unan arouezel, en-dro da azeulerezh an hendadoù.
 - B – «La chambre funéraire» Ar gambr-vez : enni e veze lakaet ar c'horfoù-marv asambles gant profadennoù.
 - C – «Le couloir» An trepas. Drezañ e c'haller tremen eus bed ar re vev da hini ar re varv. Ouzhpenn ma c'haller adimplij ar bez a rummad da rummad, en enep d'ar grugell hag a zo ur bez implijet ur wezh hek pen, an trepas en doa ur roll arouezel el lidoù kañv moarvat.
 - D – «L'entrée» An antre. Bez' eus meur a zoare dor en taolioù-maen... bernioù mein, dorioù maen pe koad gant mudurunoù, gant ur potailh a-wezhioù, dorioù-red, e toull ar gambr pe stouvoù mein. Un antre, un trepas hag ur gambr... an taolioù-maen zo tiez evit ar re varv.
- 4 Un daol-vaen zo ur bez bras a c'haller adimplij a rummad da rummad.
- 5 Lec'h-to kambr taol-vaen Mane Rutual zo etre 150 ha 200 tonenn dezhañ. Klask a reer istimañ pouez lec'h-to un daol-vaen ha diskouez pegen diaes e oa lakaet anezhe e-keñver ar benvegoù a oa d'ar c'houlz-se. Evit gwir ne ouzomp ket kalz an dra diwar-benn ar benvegoù-se.
- 6 Ouzhpenn ar c'horf pe ar c'horfoù marv e kaver profadennoù diseurt : bravigoù ha troioù-gouzoug gant mein hanter-brizius (variskit a Vro-Spagn da skouer), benvegoù hag armoù e maen-kailhastr benet, begoù saezhoù, bouc'helioù levnet hag a c'halle bezañ a-wezhioù gwir benvegoù a lorc'h e maen hanter-brizius gant stummoù brav ha levnet brav (fibrolitoù eus Breizh hag eus Bro-Spagn, jadeitoù eus Italia an norzh, h.a.), podoù kinklet, h.a. Ouzhpenn kement-se e oa ivez, moarvat, danvezioù kollidik hag n'int ket deuet betek ennomp.
- 7 Pa vez un nor e c'haller adimplij ar savadur. Well-wazh e veze lakaet ur c'horf e pep rummad. Kement-se a dalvez ne oa ket un daol-vaen ur bez stroll da-vat... Ur bez familh e oa kentoc'h, ur mozoleon tierniezh miret evit an uhelidi.

Da genderc'hel er c'hlas

Berr-ha-berr, deskrivit un daol-vaen d'ur mignon ha n'en deus ket gwelet unan biskoazh.
Marteze ez eus taolioù-maen en ho kumun pe e-kichen...
Klaskit war ar genrouedad.